



www.editionsptitlouis.fr

MARC'HEIEN AN DAOL-GRENN

Ar vreuriezh-mañ a voe savet gant Arzhur hervez lennegezh an XIIvet kantved hag etre 12 ha 1600 marc'heg a oa enni, diouzh an danevell. Pevar dezer pennañ a oa ganto : bezañ leal e-keñver o aotrou, kalonek en emgannoù, brokus evit an dud paour ha bezañ gouestlet penn-da-benn d'o itron. Tro-dro d'un daol grenn en em gavent. N'eus nemet un azezenn a chome atav goullou : hini ar gador risklus pa oa da vezañ hini ar marc'heg e galon c'hlan a oa sañset kavout ar Gral en-dro, ur c'hib kevrinus a vije bet ennañ gwad ar c'brist, hag hervez alioù all e vije ivez arouez ar puilhder, un doare da vezañ en-dro pe "fulenn ar c'bras" eun-hag-eeun.

Ar Roue Arzhur : dont a reas a-benn da dennañ ar c'hleze hud Kaledvoulc'h diouzh an annez ma oa sanket don, dre an dra-se teuas da vezañ roue. Sevel a reas urzh Marc'heien an Daol-Grenn.

E-touez ar varc'heien gadarn-se e vo meneget ar re vrudetañ :

Gwalc'hvae : niz Arzhur, mab henañ ar roue Lot ha c'hoar Arzhur. Barregezhioù gwellañ an holl varc'heien zo gantañ, skeudenn fealdec kreñv d'e aotrou eo.

Owen : kenderc'h Gwalc'hvae. E koad Breselien e voe trec'h war ar Marc'heg Du, dimeziñ a reas da Itron Feunten Barandon hag e teuas a-benn da vezañ mignon ul leon goude e-leizh a gurioù.

Lanselod : Desavet e oa bet gant Ninian. Dont a reas a-benn da derriñ strobinnerezh Morgan bac'het an amourouzien difeal ganti en Draonienn hep Distro. Marcheg kadarn hag an hini gwellañ, dont a reas da vezañ karedig Gweniwar, gwreg Arzhur.

Bohor : Mignon Peredur ha Goulc'hoed da vare Klask ar Gral.

Peredur : Unan eus ar re choazet evit ar Gral. Desavet e voe bet e-maez eus ar bed gant un "Itron intañvez". Un deiz e welas marc'heien o tremen hag e tivizas bezañ unan eus marc'heien an Daol-Grenn. An hini kentañ o welet ar Gral e voe, hogen ne gredas ket goullenn tra diwar e benn, ar pezh en dije saveteet ar bed.

Goulc'hoed : Mab Lanselod ha merc'h ar roue Pellez. Eñ eo an hini a zeuas a-benn da dapout ar Gral abalamour d'e galon c'hlan, a-gevret gant daou varc'heg all : Peredur ha Bohor.

